

Disadorn & Disul 16 & 17 Miz Gwengolo 2023



DEVEZHIOÙ AR GLAD

1 - Peulvanoù



Testoù eus mare nevezadvezh ar maen int (e-tro 5 000 kent Jesus-Krist). Bez emaint e-touez ar roudoù koshañ lezet gant an Den e Ploveilh.

Kefridioù liesseurt o doa hervez an hendraourion : bevennoù un tiriad, savadurioù liammet ouzh azeulerezh an eiennoù, ha marteze zoken spisverkoù an eurioù pe deziadurioù.

2 - Stel an Dour Ruz

Ar savadur-mañ a ra dave da flastrerezh, gant tudjantil ha bourc'hizion Kemper e 1490, un ensavadeg kouerion loc'het er Poher. Savet eo bet da vare 500 vet deiz ha bloaz an emgann-mañ, war intrudu an Ao. Yann Gwega a oa o chom e-kichen.



Kroazioù ha kalvarioù

Eus ar XVI^{vet} kantved eo kroaz an Trebe ha kroaz Sant Rok, ha hini ar C'hoed eus ar XVII^{vet}. Eus an XIX^{vet} eo ar c'hroazioù all, nemet unan hag a zo eus an XX^{vet}.



3 - Chapel Sant Filiber



Savet e oa bet war-dro kreiz ar XVII^{vet} kantved. Renevezet e oa bet e-kreiz an XIX^{vet}, ha goude-se adalek 1995. Ar gumun zo perc'henn warni.

4 - An iliz-parrez

Savet e oa bet diwar an tresoù roet gant ar chaloni Abgrall hag echuet e oa bet e 1893. Eus an XVIII^{vet} kantved eo an delwennoù a zo enni ; adreset eo bet lod anezho. Bez' eus eno ivez un *Diskenn diouzh ar Groaz* eus ar c'haerañ, anezhañ un eilad eus oberenn Jouvenel.

Digor disadorn ha disul etre 10h00 ha 17h00 nemet e-pad al lidoù.



5 - Levraoueg a studi Preder (19 hent Pierre Larhant, Menez Kloeder)

Diazezet e 1958, Preder zo ur gevarzhe sevenadurel he deus da bal diorren ar brezhoneg kempred. Abaoe 2013, e tegemer ar gumun el lec'h-mañ levraoueg dreist ar gevarzhe gouestlet d'an holl henyezhoù ha nevez yezhoù indez-europek, rann ar yezhoù keltiek o vezañ an hini pourvezet ar gwellañ.

Digor diouzh ar Sadorn ha diouzh ar Sul eus 14h00 da 18h00.

6 - Gourliorz Kerbernez (tachenn brevez)

Prenet e oa bet e 1884 gant Alexandre Massé, an hini en doa ijinet ar bouton pevar zoull. Ur skol labour-douar hag ur golf 9 zoull zo eno bremañ. An diazezadur Massé Trévidy zo perc'henn war an domani. Dizoleiñ an treug louzawouriel, **enkerzh dieub diouzh ar Sadorn 16 Gwengolo eus 10h00 da 12h00.**



7- Meilh Rozulien

Eizh milin a oa gwechall o treiñ er gumun. Ar vilin dour-mañ, bremañ perc'hentiez an Departamant, zo o paouez bezañ adsavet hag adlakaet en arc'hwel gant kevarzhe Milinerion Rozulien. Ouzhpenn he roll kentañ da genderc'hañ bleud, ar vilin a bourvez ivez tredan hag ur sal diskouezañ zo bet digoret. **Digor eo diouzh ar Sadorn hag ar Sul eus 14h00 da 18h00.**



Trugarez da deurel pled ouzh an endro !!!

Evit muioc'h a stlenn a-zivout istor ha glad ar gumun, lennit levr Jean-Pierre Royant e gwerzh en ti-kêr : **Plomelin : 3 000 ans d'histoire.**

8 - Dismantroù gall-ha-roman

Al lec'h-mañ oa un dalc'hadenn eus ar genkiz roman savet e Gorre Bodivit en eilvet ha trede kantved hon oadvezh. Ar gibellvaou, adti ar genkiz roman zo bet adaozet e 2012. Perc'hentiez an Departamant int.

Load ar genkiz lec'hiet 450 m uheloc'h n'eo ket c'hoazh digor d'ar c'hevredig e-pad an enklaskoù hendraouriezhel.



9 - Kastell ar Perennou (tachenn brevez)



Ar maner savet en XVIII^{vet} kantved zo bet brasaet er stil nevezgotek e dibenn an XIX^{vet} kantved. Terket eo bet ar gourliorz en XIX^{vet} kantved gant al liorzhawour Bühler, brudet evit liorz an Thabor, e Roazhon. Endra m' emañ ar perc'henn, Ao. Christian de Broc, ouzh e adaozañ, ez emdro dibaouez ar gourliorz.

Gweladenn heñchet ar gourliorz da hanter briz (oadourion, 3,50 €) diouzh ar Sadorn hag ar Sul eus 14h00 da 18h00.

10 - Forn Kerivoal (tachenn brevez)

Savet war-dro dibenn an XIX^{vet} kantved, ar forn vras-se n'he deus tost morse talvezet, hepken evit poazañ boued da vandenn chas jiboezer kastell ar Perennou.

Gweladennoù displeget gant an itron Candide Brageul eus 10h00 da 18h00 diouzh ar Sadorn hag ar Sul.



11 - Lestremeur



Kouldri

E-pad pell e oa stag ouzh kastell An Estreveur. Da-heul susitoù ha rannoù e voe staget ouzh maner Bodivid, hag ar gumun zo perc'henn warnañ bremañ. Eus ar XVII^{vet} ha XVIII^{vet} kantved eo. 998 toull-koulm zo ennañ. Derezioù maen a ya d'ober an doenn. Er vro eo unan eus ar c'houldrioù er stad wellañ.

Ar forn-vara

Eus an XIX^{vet} kantved eo. Prenet e oa bet gant ar gumun e 1999. Poazhet e veze bara enni evel-just, met lakaet e veze d'ober ti-kouez ivez. Distrujet e oa bet evit ul lodenn anezhi e 2005 hag emeur o paouez adsevel anezhi.

Ar c'houldri hag an ti-forn a vo digor d'ar c'hevredig eus 10h00 da

18h00 disadorn ha disul.

Gweladennoù addispleget gant Ao. Yves Rohou, ezmaer Ploveilh.

Ar poull-dour - Lakaet e oa d' ober ur pesklenn gant tud kastell An Estreveur.

Ar feunteun hag ar stêr - Eus an XIX^{vet} int moarvat.

Ur wezenn heverk

O tistremen al lenn war du an Odet, e c'hellit gwelout ur morgoad dezhañ un adeiladezh souezhus, ur wezenn bupli du gant pemp kef neuz ur stlejvil dezho. Ar wezenn-se zo rummet « heverk » e Breizh.



12 - Iliz ha bered Bodivit (tachenn brevez)

E kichen ar maner e kaver an iliz gozh eus ar XV^{vet} kantved arneveset gant ar berc'henned, an itron hag an aotrou Van den Broek. Er vered ez eus 12 bez a zo d'ar familh an Déan (eus 1779 ha 1818 eo ar re goshañ anezho).

Aotreet omp gant ar berc'henned da vont enno disadorn ha disul, etre 14h00 ha 18h00.

13 - Kirri tan kozh

D'ar Sul 17 Gwengolo, ar glad a vo ivez war an hentoù gant tremen er gumun kirri kozh eus kevarzhe henkarbedoù Leon, Kernev ha Treger. **Treuziñ a raint ar vourc'h tro dro da 12h30.**

An dastumerion a raio un arsav e **leurenn Odet** evit merennañ eus 13h00 da 16h00. Kemer a raint adarre penn an hent davet Kombrid war dro 16h00.

An dinaz a drugareka evit o ferzhiadur hegarat, ar berc'henned hag ar gwirvoziaded a skoazell da zigeriñ d'ar foran lec'hioù 'zo deskrivet el levrig-mañ.

